

Diñs aour

Ur c'hoari gant diñsoù.

Dafar	pemp diñs.
Niver ar c'hoarierien	daou c'hoarier da nebeutañ.
Pal	dastum ar muiañ a bezhioù aour.



Penaos c'hoari :

Pep c'hoarier zo ur morlaer pe ur vorlaerez.
10 tro zo en ur bartiad.
Pep c'hoarier a daol ar pemp diñs d'e dro e pep tro.


Penaos kavout an teñzor?

Ret eo kaout ur vag  , ur gartenn  hag ur bal  da gentañ-tout.

Penaos gounit ur vag?



Ret eo kaout ur c'hwech e-touez ar pemp diñs taolet.
Mirout a rez ar vag a-hed ar bartiad.



Penaos gounit ur gartenn evit klask an teñzor?



Ret eo kaout ur vag, ha kaout ur pemp.
Mirout a rez ar gartenn a-hed ar bartiad.



Penaos gounit ur bal evit dizouarañ an teñzor?





Ret eo kaout, ur vag, ur gartenn, ha kaout ur pevar.
Mirout a rez ar bal a-hed ar bartiad.



Penaos dastum pezhioù aour?

Ur wech bet dizouaret kef an teñzor, sammañ an holl diñsoù betek fin ar bartiad
hag a zo o zalvoudegezh 1, 2 pe 3.



ur pezh aour



daou bezh aour



tri fezh aour

Piv a c'hounez?

An hini en deus dastumet ar muiañ a bezhioù e fin ar bartiad.